

Karta ar falc'herezed hag ar falc'herien OGK

(e galleg war <http://www.faucheurs-volontaires.fr/>)



« Nag er parkeier, nag er skudelloù, ne fell ket deomp a OGK ! »

N'hellomp ket asantiñ e vefe strewet an OGK er maez eus al laboioù, en natur !

O efedoù a chom diasur da vat koulz e-keñver an endro ha koulz e-keñver ar yec'hed. An aliesañ ez int graet pe evit lazhañ amprevaned war eeun pe c'hoazh evit herzel ouzh ul louzaouenn chimik a lazhañ ar plantoù all. Bez ez int binvioù ul labour douar dizamant ouzh an endro. Dre hanterouriezh ar brevedoù hag an testenioù a orin war ar plant, ar marc'hadourien hadoù bioteknologel o deus lakaet an arigrap war an hadoù hag e-se e lakeont en arvar gwirioù ar beizanted koulz en Norzh hag er Su pa ne c'hell ket ken ar re-mañ na produiñ o hadoù dezho o-unan na gwareziñ anezho. Betek-henn ne anavezemp nemet ar plant OGK produet en ur dreuskas enno ur gen ne oa ket en enno a ziazaok, un doare d'ober a zo bet kavet arvarus gant ar skiantourien. Bremañ ez eus ivez ar plant OGK produet en ur gemmañ genoù pe gendeuziñ kelloù pe doareoù teknik all da dreusfeurmiñ an organegoù bev ha n'eus betek gouzout na reolenn na lezenn ebet o tennañ outo.

° Pa vez ar gouarnamant hag al lezenn oc'h aotreañ pe oc'h aozañ brasañ gounid hiniennoù'zo enep interest an holl hag enep mad an holl, daoust hag eñ e ranker chom peoc'h ha lesker ober ?

° P'o deus klasket ar sitoianed gant an holl doareoù demokratel a zo en o c'herzh, sachañ evezh o c'henseurted hag hini ar gouarnamant a-zivout an dañjerioù-se, petra 'ta a c'hellont ober c'hoazh evit kemer o c'hiriegezhioù war o chouk hervez diazez an diwall ret enskrivet e- barzh ar vonreizh ?

° En doare-se, evit ma chomfe evit gwir an demokratelezh, ne chom ganto ken nemet ar stad a redi enskrivet el Lezenn-gastizañ. Reiñ a ra dezho an tu da zisentiñ ouzh al lezenn e anv talvoudegezhioù uheloc'h savet diwar interest ha mat an holl hag a ro abeg d'o obererezhioù.

° Ar falc'herezed hag ar falc'herien a zo mennet da reiñ lamm d'ar plantoù-se, louzeier chimik en enno. Hen ober a reont hep en em guzhat, ganto stummoù stourm an disentiñ sivil nann-feulz a zouj ouzh an dud.

Ar madoù ha n'int ket e kont evit pezh a sell diouzh gwareziñ interest ha mat an holl ne vo ket klasket abeg outo.

° Ar falc'herezed hag ar falc'herien a zo emren evit aozañ ar prantadoù-stourm hag e sammont ar giriegezh diouto. Sammañ a reont ivez ez-personel dilerc'hiadennoù sivil ha diouzh lezenn o obererezhioù kaset da benn e doug ar prantadoù -stourm a-stroll. Ur c'henskoazell oberiant a vez lakaet e pleustr evit ma ne baefe ket evit an holl henienn-mañ henienn diwar he c'houst pe diwar he madoù.

Goude bezañ bet kelaouet a-zivout an dilerc'hiadennoù sivil ha diouzh lezenn a c'hellfe en emgavout ganin goude ur prantad-stourm da reiñ lamm da blantoù OGK, ha goude ma 'm dije asantet da reolennoù ha da emzalc'hioù an nann-feulster e-pad ar prantadoù-stourm, o redi da skwer da chom hep kaout warnon tra ebet a c'hellfe gloazañ unan bennak, e tisklerian bezañ a-du da sinañ ar folenn en em engouestlañ e stourm ar Falc'herezed hag ar Falc'herien.

Charte des Faucheurs(euses) Volontaires



« Ni dans les champs, ni dans les assiettes, les OGM, on n'en veut pas !
» La « dissémination volontaire en milieu ouvert » des OGM est inacceptable.

Leurs effets restent incontrôlés tant pour l'environnement que pour la santé publique. Ils sont le plus souvent soit directement insecticides, soit tolérants à un herbicide. Ils restent les outils d'une agriculture intensive.

Par l'intermédiaire des brevets et des certificats d'obtention végétale, la main mise des sociétés semencières biotechnologiques porte gravement atteinte aux droits des paysans du Nord comme du Sud de pouvoir multiplier leurs propres semences et de les protéger.

Jusqu'à présent nous ne connaissions que ceux obtenus par transgénèse aux dangers scientifiquement dénoncés. S'ajoutent à ceux-ci les OGM obtenus par mutagénèse ou fusion cellulaire et autres techniques de manipulation du vivant et qui ne sont l'objet d'aucune réglementation.

° Quand le gouvernement et la loi permettent ou organisent le profit de quelques uns contre tous et contre le bien commun, faut-il se taire et laisser faire ?

° Quand les citoyens ont essayé tous les moyens démocratiques à leur disposition pour alerter leurs concitoyens et le gouvernement de ce danger, que reste-t-il à leur disposition pour assumer leur responsabilité selon le principe de précaution inscrit dans la Constitution ?

° Dans cette situation, pour que la démocratie reste une réalité, ils n'ont à leur disposition que l'état de nécessité inscrit dans le code pénal. Il permet de désobéir à la loi au nom des valeurs supérieures ordonnées au bien commun qui légitiment leurs actions.

° Les Faucheurs volontaires s'engagent à neutraliser ces plantes pesticides. Ils agissent à visage découvert dans les formes de la désobéissance civique non violente qui respecte les personnes. Les biens qui ne sont pas concernés par la protection du bien commun ne sont pas en cause

° Les Faucheurs s'auto organisent dans les actions qu'ils revendiquent. Ils assurent personnellement les conséquences civiles et pénales de leurs actes dans le cadre d'actions collectives. Une solidarité active est mise en oeuvre afin que quelques uns ne payent pas pour tous par leur personne ou par leurs biens.

Ayant pris connaissance des conséquences pénales et civiles possibles d'un acte de neutralisation de plantes OGM et acceptant les consignes et les attitudes de la non-violence dans l'action, nécessitant entre autre de venir sans aucun objet tranchant, je signe l'engagement des Faucheurs volontaires.

Folenn en em engouestlañ e stourm ar Falc'herezed hag ar Falc'herien

En em engouestlañ evel falc'her(ez) evit gwareziñ endro ar plantoù,
gwareziñ ar goñsomatourien hag ar beizanted koulz en Norzh hag er Su.

- O vezañ ma 'z on bremañ emskiantek eus an dañjer a zo da broduiñ plantoù GK a c'hellfe strewiñ en endro en un doare dic'hortoz,
- O vezañ ma n'on ket evit degemeret e vefe lakaet an arigrap war ar bevoniezh gant ensavadurioù bioteknologel war zigarez o defe ur breved warni, nag evit asantiñ e lakfent an arigrap war marc'had an hadoù war goust ar beizanted koulz en Norzh hag er Su,
- O vezañ ma n'on ket evit degemeret ne zoujfe ket ar gouarnamant ouzh diazez an diwall ret enskrivet e- barzh ar vonreizh en ul lesker boued OGK da vezañ gwerzhzet,

E-giz ma ne 'z eus ket doare demokratel all ken d'en em dreiñ, ez eo a youl vat ez on a-du da reiñ lamm d'ar plant GK er parkeier.

En em engouestlañ a ran da zoujañ ouzh reolennoù an obererezh nann-feuls.

Kelaouet on bet eus ar riskloù a oa da gemer perzh e seurt prantadoù-stourm.

En em engouestlañ a ran ivez da gemer perzh en oberiantizoù liesseurt a gelaouiñ pe a genskoazell a vo tro-dro d'ar prosezioù a vezo da heul ar prantadoù-stourm-se.

Anv :

Anv bihan :

Chomlec'h:

Kod Post :Komun :

postel : pellgomz :

Graet ed'a.....Sinadur

Da gas da : Herve CALLO - Stang Kerim - 29340 RIEG/BELON

VIGILANCE OGM 18 - « La Presle » - 18360 VESDUN

Pezh a lavar al lezenn - War an distruj madoù :

Lezenn-gastizañ Mellad 322-1 Rann 1 :

A-zivout an distrujoù ne lakont ket an dud en arvar

Distruj madoù hag a zo perc'henn unan bennak all warno a zo kastizet gant daou vloaz toullbac'h ha 30 000 euro a daos-gastiz, nemet ne vefe ket bet ur gwall zistruj anezho.

Ar fed da dresañ enskrivadennoù, sinoù pe tresadennoù, hep aotre a ziaroek, war ar mogerioù, ar c'hirri, an hentoù hag ar panneloù-ker a zo kastizet gant 3 750 euro a daos-gastiz, pa ne 'z eus bet nemet un droug bihan diwar kement-se.

Pezh a lavar al lezenn - War dorfed ar falc'hañ :

Mellad L671-15 krouet gant al lezenn n°2008-595 : Daou vloaz toullbac'h ha 75 000 euro a daos-gastiz e kousto da nep :

3° en devo distrujet ur parkad plantoù aotreet hervez melladoù L.533-5 ha L. 533-6 eus Kod an Endro.

Met ma 'z eo ur parkad plantoù aotreet hervez mellad L 533-3 eus Kod an Endro, evel diskrivet en 3°, ar c'hastiz a zo uhellaet betek 3 bloaz toullbac'h ha 150 000 euro a daos-gastiz...

Bezañ perzh:

Mellad 121-7 : Est complice d'un crime ou d'un délit la personne qui sciemment par aide ou assistance a facilité la préparation ou la consommation.

A zo perzh en un torfed an hini en deus en ur c'houzout roet sikour pe da brientiñ pe da dennañ gounid eus an torfed. A zo ivez perzh an hini en devo pe prometet, pe gourdrouzet, pe roet urzh d'ober un torfed bennak

Diwallit :

ar gelennerien, ar stummerien hag an edukatourien a rank kaout ur roll gwerc'h el lezioù-barn dezho da c'hellout ober war-dro bugale. Ar re a zo implijet gant ar Stad C'hall pe gant un ensavadur publik a rank klask gouzout petra a c'hell en emgavout ganto ma vefont kondaonet ha kastizet.

DIWALLIT : na leuniit ar folenn a-us nemet goude bezañ lennet aketus Karta ar Falc'herezed hag ar Falc'herien hag a zo bet roet deoc'h ganti. Ma n'eo ket e rankoc'h goulenn anezhi.

ENGAGEMENT DES FAUCHEURS(EUSES) VOLONTAIRES

POUR LA PROTECTION DE L'ENVIRONNEMENT VEGETAL
POUR LA PROTECTION DES CONSOMMATEURS AINSI QUE DES PAYSANS DU
NORD COMME DU SUD

- Ayant pris conscience des dangers d'atteinte incontrôlée à l'environnement
par la culture des plantes génétiquement modifiées,

-Trouvant inacceptable que les entreprises biotechnologiques accaparent le
vivant en le brevetant à leur profit et mettent la main sur le marché des
semences au détriment des paysans du Nord comme du Sud,

-Trouvant inacceptable que le gouvernement ne suive pas le principe de
précaution dans la distribution d'aliments issus de cultures génétiquement
modifiées,

En l'absence de tout recours démocratique, je me porte volontaire pour
neutraliser les cultures de plantes génétiquement modifiées en plein champ

Je m'engage à respecter les consignes de l'action non-violente.

J'ai été informé(e) des risques que j'encours en participant à de telles
actions. Je m'engage également à participer aux diverses formes d'actions
de communication et de solidarité autour des procès consécutifs à ces
actions.

Nom :

Prénom :

Adresse :

Code postal : Ville :

Courriel : Téléphone :

Fait le.....Signature

A renvoyer : VIGILANCE OGM 18 - « La Presle » - 18360 VESDUN

CE QUE DIT LA LOI

- Sur la destruction de bien : CODE PENAL Article 322-1 Section 1 :

Des destructions, dégradations et détériorations ne présentant pas de danger pour les personnes
La destruction, la dégradation ou la détérioration d'un bien appartenant à autrui est punie de deux ans
d'emprisonnement et de 30 000 euros d'amende, sauf s'il n'en est résulté qu'un dommage léger.

Le fait de tracer des inscriptions, des signes ou des dessins, sans autorisation préalable, sur les
façades, les véhicules, les voies publiques ou le mobilier urbain est puni de 3 750 euros d'amende lorsqu'il
n'en est résulté qu'un dommage léger.

- Sur le délit de fauchage :

Article L671-15 Créé par LOI n°2008-595 Est puni de deux ans d'emprisonnement et de 75 000 euros
d'amende :

3° Le fait de détruire ou de dégrader une parcelle de culture autorisée en application des articles
L.533-5 et L. 533-6 du code de l'environnement.

Lorsque l'infraction visée au 3° porte sur une parcelle de culture autorisée en application de l'article L.
533-3 du code de l'environnement, la peine est portée à trois ans d'emprisonnement et 150000 euros
d'amende...

Complicité : Article 121-7 : Est complice d'un crime ou d'un délit la personne qui sciemment par aide ou
assistance a facilité la préparation ou la consommation.

Est également complice la personne qui par promesse, menace, ordre, abus d'autorité ou de pouvoir aura
provoqué à une infraction ou donné des instructions pour la commettre.

Attention : les professeurs, enseignants, éducateurs doivent avoir un casier judiciaire vierge pour pouvoir
s'occuper d'enfants. Ceux qui sont employés dans la Fonction publique doivent s'informer des risques
encourus en cas de condamnation pénale.

ATTENTION : ne remplissez ce formulaire qu'après avoir bien lu la Charte des Faucheurs volontaires qui
vous a été remise avec le présent document ; si ce n'est pas le cas, demandez la.